



## Ur mirva natur rannvroel

Ul lec'h hep e bar e Breizh

Ar mirvaoù natur rannvroel ac'h a d'ober ul lodenn eus identelezh Breizh ha talvoudus-kaer int a-fet ekologiezh.

Graet int evit tri zra :

- gwareziñ al lec'hioù hag ar spesadoù,
- lakaat ar glad war wel,
- deskiñ diouzh an endro.

Dwar ar mod ma vo gwarezet al lec'hioù-se e vo ivez kalite ar vuhez evit an dud a zo o chom er vro hag al lañs a vo gant Breizh war dachenn an ekonomiezh hag an touristerezh.

## Ur glad naturel hep e bar

E-kreiz maezioù Treger emañ Mirva Plounerin, un dachenn 160 hektar buhez a bep seurt enni : lanneier o zri seurt brug, taouarc'hegi plant kigdebrer strewet warne, koadoù faou ha kelenn, stankoù gant 34 spesad nadozioù-aer o nijal a-us dezhe.

Abalamour m'eo paour an douaroù ec'h eo stank ha liesseurt ar vuhez enne. Diaes eo bevañ en un endro naturel sort-se, gant se o deus ranket ur bern gouennoù plant ha loened klask strategiezhioù a bep seurt evit en em ober diouzh al lec'h.

## Fellout a ra deoc'h kemer perzh en oberoù ar mirva ?

Deuit da dremen ur c'hrogad asambles gant skipailh ar mirva naturel, amzer da gemer perzh en ul labour skiantel digor d'an holl. Ur mod a-feson d'ober anaoudegezh gant pinvidigezhioù al lec'h.

Dav eo en em enskrivañ : [reserve.naturelle.plounerin@lannion-tregor.com](mailto:reserve.naturelle.plounerin@lannion-tregor.com)

## Deiziataer

Pourmenadennoù en natur :




A-hed ar bloaz e tiskoach an natur diouzh ar mare eus ar bloaz « An evned e-pad ar goañv », « an natur e brezhoneg », « Frekañs gleskered », « War roudoù Tarka an Dourgi ».

A-hed an hañv ez eus rakwelet abadennoù bep Merc'her ha bep Gwener d'enderv.

Emañ ar programm klok e-barzh hon lec'hienn Internet.



## Evit mont di



Stank ar Vilin Nevez  
Kerliziri  
22780 Plounerin

Birou zo da gas betek parklec'hioù Kerliziri ha Lann Droenn adalek ar bourk.

[reserve-naturelle-regionale-plounerin.n2000.fr](http://reserve-naturelle-regionale-plounerin.n2000.fr)

Keleier dre

Savet gant : Créatprod - Jérôme Hamy - 06 74 29 30 25  
Patre gant : Maivann Le Borgne, Yoann Brière, Dominique Halleux, Dédicé Armor

## Mirva natur rannvroel lanneier, prajeier ha stankoù Plounerin

Réserve naturelle régionale des landes, prairies et étangs de Plounerin

Hentadoù hag oberoù evit anavezout al lec'hioù



[www.lannion-tregor.com](http://www.lannion-tregor.com)







## Stank ar Vilin Nevez

# TRES MIRVA NATUR PLOUNERIN

## Degemer ha pourmenadenn frank

## Lann Droenn



### Tro-vale

Gant troiad Lann Droenn, 5 km hirder dezhi, e c'haller kerzhet plaen ha brav en un draoñienn labour-douar gwarezet. Gwelloc'h mont etre miz Ebrel ha miz Eost. Ret eo lakaat botoù-bale.



### Ti Kerliziri

Er sal Ti Kerliziri e c'hallit piknikañ er goudor. Digor e-pad ar bloaz - Privezioù foran



### Tro-vale

Div droiad-vale a c'haller ober war droad hag a gomañs e Ti Kerliziri, tro ar stank (3,5 km) ha tro al lanneier (1km). Gwelloc'h eo mont gant botoù bale.



### Pesketa

Ul lec'h pesketa diouzh reolennoù an eil rummad eo ar stank, a zo bet kempennet evit al lodenn dioutañ a zo en hanternoz. (<http://www.federation-peche22.com/> 02.96.50.60.04)



### Un Teñzor dindan troad ur marc'h

Un tamm dudi e-pad ho troiad en-dro d'ar stank gant ar c'hoari « klask an teñzor » mod «Geocaching» : pep amrouenn a ro deoc'h daveennoù ar pennad-hent a vo goude. Klaskit mat !



### Plounerin : Unvez ispisial



Emañ an enseller Fri Furch o c'houll sikour ! Graet zo un torfed e Stank ar

Vilin Nevez. Sikourit anezhañ da ziskoulmañ an afer ha klaskit piv zo suspedet ha piv zo bet gwazh. Dre an enklask ec'h it da anavezout gwelloc'h ar vuhez er stank.

Evit mont war an droiad-mañ e c'haller kaout ur «sac'h-kein naturour», ennañ titouroù hag ostilhoù (levrioù, c'hoarioù, gevellunedennoù...).

Evit gouzout hiroc'h hag amprestiñ ostilhoù, gwelet e tiez an douristed ([www.bretagne-cotedegranitrose.com](http://www.bretagne-cotedegranitrose.com)). 02 96 05 60 70



### Diskouezadeg poltrejoù

Bep hañv e vez kinniget un diskouezadeg poltrejoù naturour war al lec'h, en diavaez a-hed ar gwenodennoù-bale.

